

# Gwerziou ha Soniou koz

dastumet gant A. ha D.-N.-D.

## MERC'HED PLOUIDER



E - tre Plou-i - der ha Tre - lez Me



'meus choazet eur ves - trez Ya,



ar vra - va, en - eur - ger, Eus



a verc'hed Plou - i - der.

Etre Plouider ha Trelez,  
Me 'm eus choazet eur vestrez,  
Ya, ar vravan, en eur ger,  
Eus a verc'hed Plouider.

Me a zo eun den yaouank,  
Eunden a bep afer,  
Mar souhetit, plac'h yaouank,  
Me a vo he servijer.

Me n'e ket madou a glaskan,  
Hoc'h amitie, ma mestrez,  
'Vit gellout bevan en ho kras,  
Keit ha ma vin e buez.

Allas, breman, emezi,  
Chansus an dimeziou,  
Abalamour d'ar bôtred,  
A zo karget a visou.

O c'halompat an nosveziou,  
E tispignont o madou,  
Gant ar butun hag ar gwin,  
Ar visou hag ar c'hartou.

— Me a bromet d'ac'h, femelen,  
Kerkent ma vin dimezet,  
Biken karten na gweren,  
Em daouarn na vo gwelet.

Me a zistago a-grenn,  
Dimeus an holl visou,  
Evit ma c'hellin dont a-benn,  
Da c'hounit ho krasou.

Setu ar plac'h-man dimezet,  
Hag ive eureujet,  
P'hen deus gallet dont a-benn,  
Da c'hounit ar femelen.

Abenn eiz de goude eured  
Ez eas d'an hostaliri,  
Gweren, karten en e zouarn,  
Adarre renevezi.

Ar plac'h a yeas d'ar ger  
Gant eur galon c'hlac'haret,  
Allas, 'mezi, me zo tromplet  
O kredi komzon gwazed.

*Dastumet gant Estig KERINET.*